

# PASION HON ZALVER

- M<sup>r</sup> Henry a public' une  
Traduction dans Karaouen  
nou santel p 22p.  
texte de  
de Feinelon -

War don gallek : *Au sang qu'un Dieu  
va répandre.*

Deut, kristenien, deut da veskan  
Ho taero gant goad Jezuz,  
En-pad ma klevfet disklerian  
E Basion truezuz.  
Pe gwir emañ laket hirie  
Gant ho pec'hejo er boan,  
Roet d'Ean, dre garante,  
Ho pue, ho tremenvan.

Mond a ra d'eur jardin distro,  
Hag eno war-n-An 'zo bec'h ;  
Eno, en-kreiz e bedenno,  
Gwech eo nec'het, gwech dinec'h.  
Spont ha karante 'n e ine  
A weler trec'h tro-ha-tro ;  
Da diwean, e garante  
'Ra d'Ean choaz ar maro.

Judaz, war-n-an eun ear zentuz,  
Mes gand ar gonnar poulzet,  
Dre eur pok a laka Jezuz  
'Tre daouarn ar zoudarded.  
'Velt-an 'ra, ziuoz ! ar pec'her,  
Pa ra van da c'houl pardon,  
Ha pa 'dosta ouz e Zalver  
Gand ar pec'hed 'n e galon.

Sethu dilezet hon Zalver  
'Tre daouarn eur rumm tud goue !  
War e visaj dous ha zeder  
Nag a flac'hado a goe !  
Eled, dindan ho tiouaskell  
C'houi dlée kuzet e benn ;  
Anez, e tleec'h da vervel  
Lakât e enebourien.

Hen stlejan 'reönt da Gaïphaz,  
Ha hennez, a du gant-e,  
Diwar-benn Jezuz a laraz  
N'oa 'met eun touer Doue.  
Dond a rei ive tro Jezuz  
Da de ar varnedigez ;  
E vouez neuze vo ken spontuz  
Ma vo anavet ganez !

En-pad ma kinnig e vue,  
En mil doare eo goapeet ;  
Ha 'vel eun den estren ive  
Gant Zant Per ec'h eo nac'het.  
Mes Jezuz a rann e galon  
Dre eur zell a garante,  
Hag a ra d'ar gontrision  
Diskenn don en e ine.

En ti Pilat ec'h eo laket  
'Touez an dorfetourien vraz ;  
Hag ar bobl a zo ken dallet  
Ma kav gwelloc'h Barabas.  
Ar choaz o deuz gret zo ifam :  
An den just zo dilezet ;  
Kondaonet eo an den divlam,  
Hag ar muntreer dilivret.

Pa eo diwisket ha staget,  
Pep hini war-n-An a sko ;  
An Oan Doue zo skourjeet  
Ken ma chom hanter-varo.  
An tolio zo dleet d'imp-ni :  
Ehanet 'ta, bourevien.  
Goad Jezuz a red, da walc'hi  
Ineo ar bec'herien.

Goude, war e benn benniget  
Eur gurunen a laker.  
Eur c'hristen, 'n eur garet ar bed,  
'Ra dismegans d'e Zalver.  
Jezuz a zo en tourmancho,  
Gant poanio braz eo gwasket ;  
C'houi, en-kreiz ar plijadurio,  
Gant bleunio zo kurunet.

Pignal 'ra da vene Kalvar  
Gand e groaz war e ziouskoa ;  
Entre an Ne hag an douar  
E lavar ar chomzo-ma :  
« D'ar re o deuz ma ofanset,  
Ma Zad, plijet pardoni ; »  
Sethu penoz ec'h eo boazet  
Ar c'hristen d'en em venji.

Pignal 'ra da vene Kalvar  
Gand e groaz war e ziouskoa ;  
Entre an Ne hag an douar  
E lavar ar chomzo-ma :  
« D'ar re o deuz ma ofanset,  
Ma Zad, plijet pardoni ; »  
Sethu penoz ec'h eo boazet  
Ar c'hristen d'en em venji.

E-tal ar groaz, kalz Judevien  
'Zo oc'h ober goap out-An,  
'N eur laret : « Mar chench planedenn,  
Ni holl a gredo enn-An ».  
Ah ! en despet d'an holl dacho,  
E tiskennfe aezet braz,  
Mes e garante hen dalc'ho  
Stag evid-omp ouz ar groaz.

O ! ne diskennet ket, Jezuz,  
Diwar ho kuele a boan ;  
Chadennet ho nerz burzuduz  
Betek heur ho tremenvan.  
Mes, d'ho ker bet bepred fidel :  
Hon zennet holl daved-Oc'h :  
'N ho kichen e karfemp mervel  
Dre garante evid-Oc'h.

Sethu tremenet hon Zalver ;  
Rak-tal an Ne, an douar  
A weler en kanv d'o C'hrouer  
Hag o tiskoel o glac'har.  
Daoust ha dirag ar Basion  
Heb ober van e chomfen ?  
Daoust ha deut ec'h eo ma c'halon  
Kaletoc'h ewid ar men ? (min)

---

Doue, ma bro hag he iez

---

## ***Eur Gozeadenn ben***

DIWAR-BENN AR BROTESTANTEC

---

Diskolet am euz d'ec'h, lennerien ger,  
abostoled ar Brotestanted, ha goud a r  
pegen braz oa o zantelez.